

HC_0016_Traouzelan

E-barzh en traouzelan **zo** ur serten merc'h yaouank
hag a ra plijadur deñ gwel'd ar baotred yaouank

D'an noz pen a n'he gwele **ya** en-touesk al liñselioù
ar plac'h-mañ a zo charmant, sav a reas amourioù

Ur sulvezh d'abardaez **ha** goude oa debet koan
mont a ra d'or ur bale betek ti he galant

'n ur antren barz an ti **ha** « bonsoir » he noa laret
ha goulenn gant ar re gozh ma voent war o yec'hed

Alleluia emezi, war ma yec'hed ec'h on
Didostit da vutunat **di** dostit da gorn an tan

Ma butun a zo pouet **ha** butunat ne ran ket
met lâret ur gaoz pe di ma vez din permetet

butunat ha kaojeal **a** vez dalc'hmat akordet
ma lâret rezonioù mat c'hwi a vo selaouet

Goût a ret-hu den ya**ouank** da betra oc'h kiriek
ya da bezh a zo erru gant ho muiañ-karet

me am eus bouchet dezhi "**oh**" me ne dislaran ket
bet eo ganin alies en ma loñj o kousket

bet eo ganin alies **ya** noz ha deiz pa garen
ha c'hoazh ne n'aen ket dalc'hmat pa vije lâret din

an traoù a ya mat a-**wa'c'h** ar plac'h a zo kontant
ne vez ket 'met Thomas kozh **a** oa o c'houlenn arc'hant

Ur eont he deus e ker hag en deus lavaret
ma ne faota 'met arc'hant an traoù vo aranjet